




## HISTOR

*Eus ar Malheur erruet gant un Den-Yaouanq,  
pehini a voa cri eus e Dad hac e Vam.*

*VAR TON CANTIC AR BLASFÉMATOUR*



1.

**S**ELAOUIT oll, Bretonet, m'o ped, còs ha yaouanq,  
Hac e cléfol un exempl meurbet zo estonant,  
Hac ouспен eo profitabl d'an oll nobl ha partabl,  
Da derri ar goal habitud zo etoues peb seurt stat.

2.

Neus cazi den n'en deve pepini e banchant,  
Qercouls goaset ha merc'het nombr bras assuramant;  
Pini so'r pec'het horrubl hep ma sonjer' ve drouc,  
Bep comz ma en o guinou, guelet e rêr partout.



5  
61

000.780

En pep fécon ve gante ar pec'het deguizet.  
 Ra zeuñ evel eur maout pe vel demezelet,  
 Mallos Doue, blasfêmi, an diaoul d'o dêvi,  
 Dra vin dall, pe drouc-speret, pe' zin evel eur c'hi.

Qent ma zomp prest da ober un dra pe un affer,  
 Comzou infam ha lubriq a leveromp bep guer,  
 Hep sonjal en ur pec'het e formomp ur chaden,  
 Ma ne guitaomp an habitud e zayomp d'an ifern.

Evit donet d'en terri, deuomp da gonsideri  
 Ar pez a zo aruet a neve en Guintini,  
 E qever un Den-Yaouanq a voa atao e coler :  
 Ra zeuñ evel eur c'hi a lavare bep guer.

Un habitud qemeret voa qementse gantàn,  
 Qement comz a brononce ne glêvet qen ountàn :  
 Pe vat pe zrouc a raje, horrubl eo compreni,  
 E lare : mar er gràn-me, me yel evel eur c'hi.

An den yaouanq-mâ savet demeus eur famill vat,  
 Hac evel calz, hep respet nac evit mam na tad,  
 Dre gomzou caër a dennas digante ho moyen,  
 Ha goude' voent reduiset da c'houl an alusen.

O sonjal vije furoc'h pa vije etablisset,  
 An daou baour-qès còs-màn o deveus het cedet  
 Qement aparchante oute d'o mab dirac noter,  
 Goude e rencjont souffri an naon hac ar viser.

Vel ma voa laqet da vestr, e commanças timat  
 Da c'hourdrousi ha da sqêi gant e vam hac e dad,  
 Dont da alc'hoec ounte bete memes ar bara,  
 O sonjal o laqaje gant naon da berissa.

Hep gallout, ar malheurus! pelloc'h o zuporti,  
 E renq an daou baour-qès còs monet ermes an ti,  
 Lezel gantàn o moyen; ô pebes nec'hamant!  
 Ranqout clasq an alusen ha mont en un toul camp.

Evea m'en doa moyen ar c'hrouadur ingrat,  
 E voe deàn proposet da zemezi timat;  
 Ur plac'h gentil a gavas, honest, fur ha prudent  
 Dre aliou tud vechant aneàn voe content.

Souden e voent demcet. Pa voe deut an termen  
 E vit ober an eured, sious, pebes anquen  
 O devoe tud an eured, hac ar plac'h e briet,  
 O velet ar malheurus e pe stad voe laqet.

Qent evit ma heureaujas ar plac'h a lavaras :  
 Na zemezìn get deoc'h ma na ve var ar plac  
 Ho tad hac ive ho mam assambles gant va re,  
 Evit rëi demp o bennos da veva en graç Douc.

An den miserabl neuse a gavas digare :  
 Va zad, va miam a zo còs, leun int a baourente ;  
 Hac ouspen int chomet clàn var o guele meus clèvet,  
 N'en dè get un domach bras pa vent o daou crevet.

Ar plac'h terrubl estonet, a respont promptamant :  
 Birviquen chanç n'or bezo, comz a rit insolant.  
 Dre'r bêvare gourc'hemen Douc en eus commandet  
 Enori an tad, ar vam, ha douguen dè respect.

Chanchit propos, emezàn, m'o ped hac o supli,  
 Mar deü ar re-se d'am eured nie yel evel eur c'hi ;  
 Ne fot get din e lare o tud vent ampoesonet,  
 Ma teufe'n daou lous còs-se d'aparissa em eured.

Evel pa vije'r miracl, Douc ractal a hermet  
 E teu an daou baour qès còs d'aparissa er banquet ;  
 Siouas, o mab libertin, borrupl é compreni,  
 Pa voa guir vella'r banquet e za evel eur c'hi.

Alies epad e vuez en nevoa goulennet,  
 Vel ma voa e habitud beza er stad-se laqet;  
 O veza leun e vasur e voe diffiguret,  
 Nemet e benn, e visach, e form ur c'hi barbet.


M'ho lèz da gònsideri pebes spont hac eston  
 O devoe tud an lieured, crena rê o c'halon  
 O velet ur seurt torfet êruet en o fresanç:  
 O pebes tristidiguez e lec'h rejouissanç!

Hep na debri nac eva e chomas er stat-se  
 Er spaç eus a no debes, o sonjal nos ha de;  
 P'eo bet holonte Doue eo êt en ur seurt stat,  
 O veza cri ha dinatur eus e vam hac e dad.

Dre ma voa calz a famill a bedas evitan  
 Doue hac ar Verches Vari da rêi ar c'haaç dezàn,  
 Goestet voe d'eur plaç devot, varben an no devez  
 E teuas d'e stat adare, dre voyen ar Verc'hes.

Cetu aze un exempl hac ouspen ur miracl,  
 A so meurbet profitapl d'an oll, nobl ha partabl,  
 Do derri ar goal habitud, da enori mam ha tad,  
 Vit caout recompanç en ên digant hon Doue mad.

*A M E N.*



## G U E R Z

VAR SUJET DAOU ZEN-YAOUANQ MASQET.

*Var an ton ancien.*

1.

**S**PERET - SANTEL , me ho suppli da réi sclèrijen  
 d'am speret ,  
 Evit disclèria un exempl a so pitoyabl meurbet ,  
 Erruet gant daou zen yaouanq , a voa o daou o c'hevà  
 Ebars en un hostaliri da volarge diveza.

2.

Daou zen yaouanq a galite pere n'anvàn qet amàn ,  
 A voa o daou o tebochi , sionas , et var ar bed-màn !  
 Na pa voant da veza mezo , ma zint en em goncluet  
 Da guemer ur vascaraden da vont en nos da redec.

3.

Possedete voaint o daou , siouas , gant an drouc-speret.  
 Ar c'henta croc'hen un eujen var e guein en deus laqet ,  
 Hac eguile croc'hen ur gaor , na ma lerjont neuze :  
 Ni a so bremàn diaoulou da renta brezel da Zoue.

Mont a ra an daou zen yaouanq ebars en qêr da redet ;  
 Hac unan demeus aneze en deveus bet rancontret  
 Eur bêleg pihini a zougue ar sacramant dereat bras ,  
 Evit cas da eur paour qèz coz pihini a voa fall bras.

Heuliet en deus ar sacramant bete ti ar paour qèz clàn,  
 En toul an nor e zeo bet chomet, ma neveys lavaret deàn  
 Me zo an diaoul, emeàn, a zo deut da dal da dy,  
 Hac en instant ma yi maro da eue a yel ganén.

Ar paour qèz clàn en e voele en em laqa da voela,  
 Ar bêleg ous e gonsoli en deveus lavaret dezâ :  
 Tavit, va mignon, emeàn, tavit ha ne voelit qet,  
 Unan eus ar vascaraden zo deut envoas d'o quelet.

Ar bêleg ous en em distrei ous an den milliguet-màn,  
 Gant an hosti en e zaou zorn en deveus lavaret deàn :  
 Lam da vasq divar da visach, sete amàn da Zoue,  
 Ha gantàn te vo punisset qent ma vo vare'hoas an de.

Hac én en em distrei neuse gant eur zellou arrogant,  
 Gant comzou vil ha disonest eus Jesus er sacramant :  
 Me zo un diaoul, emeàn, un enemi bras da Zone,  
 Hae a rento dean brezel qercouls en nos hac en de.

P'en devoa laret e gomizou evel un den arrajet,  
 Er meaz an ti neuse soudan var ar ru ê sortiet;  
 Mes pa yas en avis crial e sant e vond o yena,  
 Maro-mic ê, var ar pave, siouas, ê deut da goea.

Eguile gant croc'hen ur gaor dre ruyou qêr o redet,  
 A rancontras e gamarad na var ar ru gourveet:  
 Me zo re hardi, emean, va c'hamarad, da sponta;  
 Na c'heus bremâ nemet sevel, ha ni yelo da eva.

Caer en devoa emân guervel e gamarad millignet,  
 E vasq a lam divar e visach o sonjal gouell e velet;  
 Mes pa velas e voa maro, e galon a so rannet,  
 Ma tolas eno ar c'hroc'hen, hac eus ar vro ê sortiet.

F I N.

